

FOAR KARAEZ.

150

Me ho ped, marc'hadourien,  
 Re Bariz ha re Rouan, (bis)  
 Pen eot da Garaez  
 Da foar ar gâlan -goañv (bis)  
 Nan it ket da lojañ  
 N un ti bras ac'hane  
 Peotramant c'hwi 'n d'vo  
 Kig marc'hadour d'ho koan. (bis)

Me eo ma mestrig mat  
 'Zo o tigeriñ ane  
 'Vit taol ar c'horfoù marv  
 Ur-maez gant ar mare.

Ne gane ket ar big  
 nag ivez ar vran  
 O, pe oa Margotig  
 war baveoù Rouan  
 O tougen koefurenn  
 Ha dantelezh ledan.

Ur marc'hadourig yaouank  
 'N ouie ket an doare  
 Oa aet da c'houlen lojañ  
 D'an ti bras ac'hane. (bis)  
 O salud deoc'h, Ostiz hag ivez Ostizez  
 Hag ivez Ostizez,  
 Hag'hen 've ket a voien  
 D'am lojañ un nozvezh. (bis)

Kanet e mis kerdu 1952  
 gant an Itron Morvan, eus  
 Kergilaven, FLOUEZEG.

O geus, mezi, marc'hadour,  
 Tostait ~~xxx~~ ~~xxx~~ azezit d'ho koan,  
 Ken e fatik'fot  
 Merc'h koant d'ho servijiñ. (bis)  
 O kezeg 'vo soagnat ~~xxx~~  
 Gant paotr ar marchosi. (bis)

(Ar Werz-mañ a gaver e Luzel, Gwerziou  
 I, p. 354, hag e Duhamel p. 40. Komzoù  
 ha ton disheñvel a-grenn).

Pe oa ar marc'hadour  
 O na ~~xxx~~ e goan, (bis)  
 Hag eñ oc'h evañ ur wech  
 Da yec'hed ar vatez vihan.  
 Alon, mezi, marc'hadour,  
 Debrit hag evit ho koan. (bis)  
 Ha lezit ganimp 'n hon c'harg  
 Hon matezhig vihan. (bis)

Bezañ 'm eus e<sup>n</sup> Rouan  
 Bugale ha pried,  
 Ha N'ho traisan ket,  
 Ha daou vreur marc'hadour.  
 Am eus ~~xxx~~ ivez. ahont  
 Mar dez da varc'hadour  
 Ne 'n devo unan ane.

Hi o reifi ur c'hwezhadenn  
 A ~~xxx~~ lazhañ ar goulou. (bis)  
 Eskuz, ma mestrig mat,  
 Eskuz, ma eskuzat,  
 Gant an horeur 'm eus bet  
 Ar goulou 'm eus lazhet  
 Me 'ya d' elumañ,  
 Vezet ket daleet.

Pe oa ar vatezhig  
 'Vont gant ar vinn d'an traon,  
 Marc'hadour kent ha hi  
 War seuliou e loeroù. (bis)  
 An Actrou a c'houle

Piv 'zo war-dro ma forziou  
 Ar c'houlz-mañ eus an noz.

the  
 the  
 'a  
 nd  
 an  
 ck  
 der  
 nei  
 ir  
 th  
 m  
 , et  
 go  
 w  
 che  
 oaf  
 doi  
 elo

Z  
 G